


davet ar prad du deizlevr 1976



gant
 Youenn TROAL
 IMBOURC'H

IMBOURC'H, KELAOUENN BOLITIKEL

Eizhvet bloavezh

Niverenn 85

31 Genver 1977

<i>Kemenn.....</i>	<i>p.3</i>
<i>Deizlevr Youenn TROAL er Perou e-pad ar bloavezh.....</i>	<i>p.5</i>
<i>Lizher.....</i>	<i>p.51</i>

Koumanant-bloaz : 40 lur. KRP : 1 534 25 Roazhon,
Y. Ollivier. Deraouiñ a ra ar c'houstonantoù e miz
Genver

Priz an niverenn-mañ : 6 lur. Ar pennadoù a zo da
gas da : Y. Ollivier, 7 bd. A.-Burloud, 35000 Roazhon.

Niverenn-wask CPPP : 50 015

KEMENN

Evel m'hon eus lavaret endeo, kavet e vo amañ deizlevr Youenn TROAL evit ar bloavezh 1976.

Hor soñj e oa da gentañ embann an deizlevr-mañ a bennadoù distag, dre ma vijent degouezhet. O vezañ avat ma eo bet stank a-walc'h an danvez evit pep niverenn abaoe dibenn an hañv hon eus kavet gwell, a-benn ar fin, embann an deizlevr en un niverenn hepken.

Danvez an niverennoù da zont a zo bet merket en niverenn diwezhañ.

Goulenn a reomp start digant hol lennerion adkoumanantiñ adal bremañ pe reiñ deomp da c'houzout ma ne fell ket mui dezho degemer ar gelaouenn.

~~~~~

KEMENN

Dont a ra an niverenn-mañ er-maez gant kalz dale. Trubuilh hon eus bet gant ar benveg-moulañ a implijemp betek-henn ha gwell eo bet ganeomp pourchas un ardivink all a jaojfe gwell ouzh al laboura reomp peurvuiañ hag a rofe tu deomp, spi hon eus, kempenn gwelloc'h embannadur ar gelaouenn.

Evit an hevelep abeg eo bet daleet tennidigezh "Ar Briñsez hag an daou alarc'h" a zeuio er-maez a-benn pemzek-vez bennak. Kaset e vo kerkent d'ar rakprenerion.

Un tamm dizingal eo bet mouladur an niverenn-mañ dre ma ne oamp ket gourdonet ouzh an ardivink nevez. Pediañ a reomp hol lennerion d'hon digareziñ.

A-benn teir sizhun e teuio er-maez an niverenn diwar-benn Langleiz.

-----

DEIZLEVR Youenn TROAL er PEROU

Deroù ar bloavezh 1976

Yaou 15 Genver 1976

Disuledo, war-dro 5 eur 30 diouzh an noz. Radio Pekin... Radio Pekin... a lavar ar vouezh meur a wech. Derc'hel a ran da selaou ha setu ketchouaeg o tont gant ar gomzerez ha goude, gant ar c'homzer. Obidoù Chou-En-Lay edont o tanevelliñ. Hollvedel eo Aviel Mao ; ur feiz neuze da vezañ prezeget d' an holl bobladoù ha bevet ganto a-benn bezañ evurus.

Gwener 16 Genver 1976

Div chapelig zo war ar stern. Nann, n'omp ket klañv gant kleñved ar maen ! Hon hini n'eo ket rak an darn-vrasañ eus ar pezh a saver zo gant pri gwenn pe velen. Tiez eo a fell dimp evit ma c'hallo ar gedhinienn en em vodañ. Plijout a ra din mont da skorañ gant pig ha pal. Pa ranker dibunañ dek kilometrad gwenodenn digompez a-benn tizhout ar chanter, turiañ douar un nebeut eurioù ha distreiñ d'al loj d'ar pardaer e vezer goullonderet ha goullonderet mat. Na plijus ha deskus koulskoude gwelout a-dost penaos e labour an dud ! Sellout outo o stalañ un doare kased bras e pevar zamm da leuniañ a bri ; sellout outo o vresañ hag o stardañ an douar-se gant kefioù benet e stumm morzolioù ; sellout outo war an ehan o krignat hag o chaokat delioù koka ; sellout outo o ledañ war an douar o zammoù lien, berniet warno 'youka', maiz a bep seurt, liv : boted bleudek ur spont, mat da stambouc'hañ ar frankañ gourlañchenn !

Ur vouezh a lavare ar mintin-mañ : "E penn-kentañ an Iliz ne oa ket a ilizoù ; e tiez unan pe unan anezho en em vode ar gristenion. E penn-diwezhañ

an Iliz, e tiez a-nevez ec'h en em strollo ar feizidi." Ne vern penaos, ma stlap an dud an Aotrou er-maez eus o c'halon, arabat dezho soñjal e chomfe en o nevedoù.

Yaou 29 Genver 1976

N'eo ket amañ hepken ez eus parkeier e stumm dezreziou (andén=derez), krapet ouzh kof ar menezioù. E Yemen eo heñvel : e lec'hioù zo eus ar vro-se, digor war ar Mor Ruz, e c'haller gwelout tri-c'hant skalier gounezet o krimpant betek krec'h-ennoù 3000 metrad dezho.

An daou yaouank a zimez hiziv a fell dezho ober ur gouel digoustus. M'o defe gallet ober o eured hep testoù o defe graet. Pemzektez zo e kinnige din ar plac'h Jezuz e-unan e-giz test ha, disul diwezhañ, ar Werc'hez. Nebeut a feiz en un Iliz kigel, neketa ? Pe marteze, hep-tra-ken, c'hoant da gaout testoù hep ober ganto an disterañ frejoù?

Merc'her 11 C'hwevrer 1976

Ur pennad amzer mat a zo en deus un ti-embann a C'halaikia (Galicia) lakaet en e soñj moulañ levrioù relijiel e galaikianeg ('gallego' e spagnoleg). "XEIRA NUEVA" ("DOUAR NEVEZ") eo talbennet an dastumadenn-se. Unan eus an oberennoù nevez deuet er-maez eus ar wask zo ur studiaden a-zivout levr-kentañ ar Bibl : ar C'HENELIEZH ; INTRODUCTION AO XENESIS. E spagnoleg e vefe : INTRODUCCION A GENESIS. Nevez zo em boa lennet un dra bennak diwar-benn ur bladenn o kinnig un oferenn e "gallego". Ne ouien ket avat he doa Galaikia ur yezh dezhi hec'h-unan, ur "c'haer a yezh", a skriv ar gelaouenn NUEVA VIDA, d'ar 15 C'hwevrer 1975.

Lun 16 C'hwevrer 1976

Un ozac'h yaouank a lavare din dec'h da noz penaos ne c'halle ket dont d'an oferenn dre ma oa ret

dezhañ chom da ziwall e barkad maiz ouzh ar chas.

- Ouzh ar chas ? Petra an diaoul a zroug a c'hall ober ur c'hi en da barkeier ?

- Ma, debriñ ar maiz... Chas naoniek a ya da glask boued e-lec'h ma kavont hag a grign kement tra a gouezh dindan o skilfoù. Lemmel a reont gant ar penn, a ya ganto a vegadoù ; ur wech boulc'het ne zale ket da vezañ breinet gant ar glav. Kollet em eus endeo un tri-ugent penn bennak.

Deuet eo betek ennon daou bennad troc'het en LE MONDE (5-6 Kerdu 1975) ha sinet gant Kristian Colombani. Enno e kavan un dezenn dianavezet ganin ; ne lavaran ket e vefe nevez evit se. "Daoust ha bez' ez eo ur yezh," eme ar c'hazetenner, "ar melezeour nemetañ ma par ennañ bed meizel un hinienn en e bezh pe daoust ha ned eo nemet ur benveg da zaremprediñ an dud all, e gefridiezh dezhi o vezañ tizhout an hollveziadel (1) ?" Piv zo barrek da gas an dorzh d'ar gêr ? Ne c'hallan eilgeriañ nemet ar pezh a santan : distagañ a ran kalz kastilhaneg, nebeut ketchouaeg. Hogen asur eo ; hini ebet eus ar yezhoù-se, daoust maz eus unan tost tre d'am c'halon, hini ebet anezho ne vo 'kig eus va c'hig' ; krouelloù dir nemetken e mammoù ervennet gant gwad ruz.

"Ar yezh vrezhonek" eme c'hoazh Colombani, " marteze ne adc'hounezo biken an dachenn kollet ; ar stuzegezh vrezhon avat a zle mont da get en abeg da se ? " Kenderc'hel a reer atav e Bro-C'hall ha, zoken, e Breizh, da skrivañ traoù ken droch. Ha bez'e kredfe ar c'hazetenner-se, en taol-mañ, drochoc'h eget e votoù, skrivañ un deiz kement-mañ : "Setu mouget ar galleg er bed a-bezh, nemet e Haïti ; ar stuzegezh c'hall n'emañ ket en arvar avat evit keloù se ! " C'hwezh-fall vMarks a zo gant seurt tezennoù : ar yezh n'eo nemet un usframm bennak.

(1) "Hollveziadel"="universel".

Gwener 12 Meurzh 1976

An deiz all e klevis galleg o tont eus Manila e Filipinañ.

Emaomp o paouez echuiñ gant an Ened. Ur sizhun penna-benn ! Skuizhus hag enoeüs, e gwirionez, rak bac'het e chomont en hevelep ton ha son, en hevelep diskan kanet ha diskanetikant ha kant gwech. Aet pell zo ar gorollerion d'o gweleoù, e chom ar sonerion, evel peulioù dindan ar glav, da zistagañ an nebeut a notennoù a zo o re, hag an tabouliner da skeiñ, unton, war e daboulin. Ha war an dachenn-mañ n'he deus ar froudenn gwir ebet. N'eus tu ebet da dec'hout diouzh al lid a rank bezañ kaset da benn, betek euriqù kentañ an deiz war-lerc'h. Ur sabatur eo merzout pennegezh an Amerindianed kiet da adober bep bloaz pezh a oa bet sevenet warlene ha se en anv ar c'hiz, hep gouzout nag ar perak nag ar penaos.

Hag evel m'em eus lavaret endeo, koroll ha boutailh a ya da heul. Kement hini a fell dezhañ kemerout perzh er gouel a zle en em wiskañ ha paeañ e skodenn. Evit glebiañ ar gorzailhenn eo an arc'hant-se, keit ha ma vezer war an ehan ha keit ha ma vez tro en treid. Tapout ur c'horfad eo pal al lodenn vrasañ, hag an hini a fell dezhañ chom diwar an dour, ne gredo ket mont e-barzh ar c'hoari. Ur gudenn zo neuze : ur c'hristen n'eus ket c'hoazh dezhañ ur bersonelezh kreñvaet ne c'hall ket kemer perzh er gouel... paz eo ar gouel ken ret e buhez an den hag ar bara ! Penaos ober ?

Lun 5 Ebril 1976

Edon o tiskenn gant va marc'h-houarn. E-kreiz an hent emañ ar mousig.

- Deus kuit eus aze," a hop dezhañ e vamm, "deus kuit, gringo !

- Tomasa, penaos an diaoul ec'h anvez da vabig? E lavarez dezhañ 'gringo' ! Emaout o lesenvel da baotr !

C'hoarzhin a ra ar vaouez.

- Abaoe pell zo," emezi, e lavaran dezhañ 'gringo', rak dalc'hmat eo bet troet da zrailhañ kastilhaneg ; ne felle ket dezhañ komz ketchoueg."

Hag e kendalc'he da c'hoarzhin. 'Gringo' a vez lavaret amañ hag e Su-Amerika a-bezh d'ar re a zo dezho kroc'hen gwenn ha dreist-holl d'ar wennidi o tont eus Norzh-Amerika. Gwelet hoc'h eus a-wechoù ur vamm o lesenvel he mab ? Me, morse.

Lun 12 Ebril 1976

An deiz all, o tont eus Alamagn ar C'hornog, egiz bourd ha fars, keloù eus Goarniged Moelan. Lavaret a rae ar vouezh : "Aet eo an trec'h ganto. Daoust d'an anvioù roet d'ar vugale he deus ranket ar Stad c'hall plegañ d'o lakaat war he rolloù ; aet int zoken betek lezvarn Haag. Fellout a rae dezho kaout ar geodedelezh vrezhon. N'ouzont ket ned eo Breizh nemet ul lodenn eus Bro-C'hall?"

Meurzh 20 Ebril 1976

Soñj am eus c'hoazh eus prezegennoù war ar sevenadur graet gant Maodez Glanndour, e Ploueg-ar-Mor, d'ar mare m'edo Armañs ar C'halvez e-kreiz e vrud, o kas en-dro e skol divyezhek gant kement a c'hred hag a nerzh-krouiñ. Hervezañ, an den a zo un ti a zaou solieradur a-us d'ul leur-zi : an armerzh en traoñ, ar sevenadur er c'hentañ estaj hag ar gra-vez en eil. Pa ra diouer pe mard eo aet dirapar unan eus al lodennoù-se, ned eo ket plomm an den en e sav. Ha petra 'oa d'an ampoent ar sevenadur evit hor skrivagner meur ? Paz eus un den o skrivañ un oberenn en e yezh, pa ouzer seniñ gant ur benveg, pa oar bizied brodañ gwiskamantoù, pa saver kanennoù ha barzhonegoù, pa gemerer amzer da gizellañ ar maen hag ar prenn, pa roer ur stumm kaer d'an ti, d'an iliz, d'ar chapel, d'ar feunteun, d'ar puñs, pa zibuner kontadennoù... en ur ger, pa grou an den, ez eus, e gwirionez, kultur,

ha Maodez Glanndour a rae un diforc'h krenn etre kultur ha sevenadur : kirri-nij, tankirri, keflusk-erioù, ardivinkoù, hentoù bras koltaret, trenioù, dourdredanvaoù H.a. holl int peurheñvel dre ar bed diorreet ; se hepken a zo sevenadur ; ha kalz tud en em vata eus ar sevenadur etrevroadel-se, hep kaout an disterañ kultur. Soñjomp en hini hag en deus e walc'h oc'h azezañ bemnoz dirak skramm bihan e skinwel.

Ha setu amañ un diverra eus ar pezh a zo bet kutuilhet ganin an deiz all, diwar vuzelloù un dominigad gall, rener an Ensavadur Paskourel Andinat, e Kuzko. Feiz, n'ouzon ket peseurt ger dibab, pe sevenadur, pe stuzegezh, pe sevenadurezh, pe kultur. Ma ! Deomp dezhi gant kultur a zo, hervez Yann Huges, kement tra denel ; pep tra bevet gant an den a zo kultur ; pep tra sevenet gant mab-den evit urzhiañ, difenn, denekaat a zo kultur. Kontrol bev eo da anien, da natur. Al loened n'eus ket dezho a gultur ha n'eus ket un neudenn naturel, anienel, er pezh a zo bet stoket gant mab ar vaouez. N'on ket feizoniour ; en em c'houlenn a ran avat petra e teu da vezañ an naturel, an anienel m'eo diazezet warnañ kelennadur HUMANI GENERIS a-ziyout reolerezh ar genel, pa soñj da Baol VI e klot an divez-se gant Komz Doue ha gant Dasroadur an Iliz.

Kulturel eo enta kement a zo kalvezel ; rak e-lec'h m'emañ an den, eno ez eus kalvezelezh evit reoliñ an douar. Diwar ar galvezelezh e sav ar madoù kenderc'het gant Mab-den ; diwar zaspazh ar madoù eo, avat, e sav an diouer evit darn, un diouer hag a zle bezañ reolet gant an armerzhouriezh, - rak a-gevret gant re all e vevomp ; dav eo d'an dud en em reoliñ an eil egile ; diwar an ezhomm-se ez eo diwanet ar politikerezh. Ivez, dre ma kenvevomp gant hon hentez ez eo ret deomp e zaremprediñ hag e anavezout, pezh a vez graet dre reizhiad arouzennañ ar yezh, evit ar pep brasañ ; e tachenn an arouzennerezh emañ ar gevredigezh etre an dud.

Merzout a ra an den avat ne c'hall ket mestroniañ pep tra ; bevennet eo, chom berr a ra : dont a ra skorn, sec'hor, dour-beuz, un enkadenn-ved, monc'hwezh, h.a.... N'eus tu ebet d'an den da vont larkoc'h : harzoù a zo ; un dra bennak, unan bennak a zo du-se pelloc'h ; un dra bennak, unan bennak kreñvoc'h. Ha setu an den war glask ur reizhiad evit reoliñ "pezh a zo du-hont". Un darvoud a erru ; diouzhtu, ar vamm gant he babig a c'halv an Aotrou Doue ; gant ar gravez e klask an den lakaat e zorn war ar pezh a zo pelloc'h ha kreñvoc'h. Petra eo ar pezh a zo kreñvoc'h ? Henn gouzout a reomp dre an Diskuliadur ; n'en deus ket hemañ avat tizhet an holl c'hoazh.

Ne gred ket din e vefe bet lavaret e tegouezh mat ar berrdres-se da gement den a vev hiziv war an douar ; mont a rafe eeun avat gant amerindian an Andou. Rak hemañ ne c'hall ket reoliñ an douar : deuet eo davetañ ar c'halvensperierezh (1) ; ne c'hall ket kaout krog war an armerzh : priz e genderc'hadoù a zeu "eus al laezioù", e-giz ma lavare gwechall ar Vigoudenn ; taolet int warnañ eus krec'h. N'emañ ket gantañ kennebeut stur ar gevredigezh hag ar politikerezh : n'eo ket ozac'h er gêr. Lima ha paotred Lima a zo a-ramp war e dachenn. Tachenn an arouzennañ n'emañ ket ivez dindan e zamani ; distroadet eo e stuzegezh diehan gant an hini a zo deuet eus Spagn ha mastaret eo an darempred a c'hall skoulmañ gant e genouenn drebenn a yezh Kastilha. Erfin, ne chom gant an den-se nemet ur reolerezh : hini "ar pezh a zo pelloc'h". Skarzhet kuit eus park ar c'halvezerezh, an armerzh, ar gevredigezh, ar politikerezh, an arouzennerezh, e talc'h penn war dachenn ar gravez ; ur c'hreñvoc'h eo evitañ ; hag ennañ e vern e holl eneberezh. Soñjal a rafe dimp bezañ tal-ha-tal gant ar c'hiz disec'het ha padal emaoamp e-harz ur c'hastell. Ha n'eo ket brav e sezizañ. Yann Huges a roe ur skouer,

(1) "Kalvensperierezh" = "insémination artificielle"

hini gourambrougadeg Aotrou ar Burzhudoù, e kêr Lima. Komz eus ur mor a dud a zo dister evit displegañ pezh maz eo bep bloaz, e-doug miz Here, an darvoudenn gravezel-se. Warlene, e 1975, e c'houlennas ar C'hardinal krennañ un tammig ar gouel, disterniañ ur wech serret mat an noz. Gwashedoc'h-gwazh o deus kiet an dud, avat: seizh eur hag hanter-kant he deus padet an abadenn, hep kemerout amzer da dennañ an anal. Ha se daoust d'al laeronsioù, d'ar gwallerezhioù, d'ar gwall-daolioù a bep seurt. Petra eo seurt pennegezh? Reoladur an TREHONT! Hini nemetañ an den bet diframmet digantañ pep sturierrezh? Marteze. D'am meno, kentoc'h, nerzhioù an droug oc'h ober o reuz war an douar patatez-mañ.

Lavaret em eus a-us e oa diaes resisaat ar pezh a lakaer dindan ar ger 'kultur'. Rosellini, ar mailh brudet war ar filmoù, en deus diskleriet e oa, d'an izelañ holl, 250 ster d'ar ger-se. Kit da welout neuze!

Lun 10 Mae 1976

C'hwezek vloaz en deus ar paotr. "Va mamm-baeron," emezañ, "a c'houlenn diganin tennañ kuit eus he fenn he blevennoù gwenn. Daoust hag ur pec'hed eo?"

Meurzh 11 Mae 1976

Ur mailh a vreutaer eo va mignon Per ar Gall, o vevañ bremañ war e leve, du-se, e-tal ar mor e Ploueg-Plougernev. En em glemm a ra dalc'hmat eus e vrezhoneg. "Ha me 'zo," emezañ, "va brezhoneg evel 'Roc'h Sisufos': ret eo strivañ di-baouez evit e lakaat war-grec'h, pe blegañ d'e lezel da vont d'an traoñ!" Anat eo n'en deus abeg ebet d'en em chalañ eus e yezh. Dont a ra gantañ ha gortoz a ran e 'grouadur'kentañ. Gwasket eo bet nevez zo gant un oberatadenn boanius, pezh na vir ket

outañ a vont d'ar gad gant e bluenn lemm a oar sankañ don e feskennoù dispennerion hor bro. "Daoust din da vezañ stlejet va buhez un tammig evel ul loen abaoe hanter miz C'hwevrer, n'on ket chomet da vorediñ e-pad an holl amzer-se. Diy sizhun 'zo edon o vraslenn LE MONDE, ponner va malvennoù, etre hun ha dihun, paz eo kouezhet va sell, a-daol-trumm, war ur pennad savet gant P. Viansson-Ponté, ennañ dalc'hmat an hevelep diotachoù diwar-benn Breizh, Okitania, an emrener-ezh, hag all... Ar paotr-se a zo iskis avat. Skrivet em boa dezhañ a-zivout LE CHEVAL D'ORGUEIL gant Per-Jakez HELIAS, ul levr hag a zo oc'h ober berzh spontus hag en deus bet ur priz bras gall (n'ouzon ket ken pehini eo). Fellout a rae din dedennañ e evezh war ar poent-mañ: ma vije bet embannet al levr-se e brezhoneg (embannet e vo, sañset, dindan an talbenn "BUGALE AR STARTIJENN") ne vije bet gwerzhet nemet un nebeut skouerennoù ha, mod pe vod, ne vefe ket bet skoazellet ar skrivagner gant arc'hant ur priz gall bennak. Pezh n'eo ket reizh rak, paz eo Gallaoued ar Vrezhoneg, ez eo dellezek o skrivagnerion vrezhoneger da vezañ harpet evel ma tlefe bezañ, a-hend-all, ar skrivagnerion euskarat, okitaniat, elzasiat h.a. Va Doue! Tapet em eus va fegement digantañ! Ne c'hellen ket chom hep kas an dorzh d'ar gêr kerkent ha ma vefe tu... hag an tu 'oa kavet! Dastumet em eus va mennozioù eus va gwellañ, lemmet va fluenn, skrivet... Ar respont 'zo deuet, ken diot ha biskoazh. Eilgeriet em eus d'ar respont, eveljust... N'on ket evit lezel ar maout gantañ, neketa! Ha setu an tabut o vont madik a-walc'h en-dro adarre!"

(Lizher eus an 20 a viz Ebrel 1976)

Lun 17 Mae 1976

Da Sul-Fask ez eus bet drouklazhet amañ, tostik-tra d'ar vourc'h, un hiron bet archer er gêriadenn ha graet gantañ goude-se e neizh war un tachad mat




a zouar. Ur gwall zen. Ur paotr yaouank, moarvat en deus roet dezhañ taol ar marv gant ur machete, ar gontell vras-se a zo, a-dreuz d'ar c'hevandir-mañ, falz an holl. Perak ? E c'hoarig a oa bet "roet" da sevel d'ar paotr kozh, aet e vaouez pell dioutañ ha, marteze e veze graet fall dezhi. Seblantout a ra evelato en defe skoet evit lemel digantañ e damm arc'hant. Paket e oa bet ar muntrer met dindan an nozvezh kentañ tremenet en toull-bac'h, en em silas kuit bravik-tre ha liv ebet mui eus ar paotr. Ha dre amañ, menez ha koad, menez ha brouskoad, ode ha froudoù ' zo repu diarvar evit an hini ez eo bet torret gantañ al lezenn.

Graet gantañ e daol e touaras ar c'horf-marv dres e-kreiz ar ganol a bourchas douar d'ar gêriadenn a-bezi. Ur sizhun-pad ez eas ar braoued-se gant an dud. Deuet ar c'heloù dezho, m'ho pije gwelet gwazed, merc'hed, bugale, o vont du-mañ, du-hont da glask dour ! Bara fardet n'eo ket bet gwerzhet. Un den nemetken n'eo ket kouezhet ar walenn donjerus-se warnañ ha me eo an den-se. Rak evel m'em eus kontet endeo, e-barzh div granenn kludet a-us d'ar privezioù. Ar pinvidig a c'hall en em ziflipañ peurvuiañ : e Gwatemala, ar bloaz-mañ, tiez piv a zo kouezhet en o foull ? Re ar beorion, savet dirapar !

Merc'her 19 a viz Mae 1976

Du-se e Louaneg n'eo ket bet pompadus gouel Sant Erwan ; gwirion eo bet avat. Pebezh planedenn gaer hini Loeiz ar Floc'h, hor Maodez Glanndour divarvel, bezañ person war-lerc'h ar person Erwan Helouri ! Maz eus un deiz ur c'horn baradoz evit ar Gelted Brezhon, ra vo Louaneg renevezet e Tan ar Psered ! Louaneg-adal d'an inizi, Louaneg e peoc'h mor an tarzh-deiz, e sioulded mor ar serr-

noz. Louaneg pulluc'het e diez-hañv gaonac'h gant tanfoeltr an Neñv. Louaneg dic'hastet e sportvaoù idolazeulergant kop kounnar an Aotrou. Louaneg disaotret eus koltar ha simant an touristerezh, Louaneg, liorzhañ c'hlas Erwan, a vo hon rouantelezh. Da virviken. Ha ni a evo dour sin e feunteunioù nad afont morse da hesk.



*[Faint, illegible text visible through the paper from the reverse side of the page.]*

DEIZLEVR YOUENN TROAL (kendalc'h)

20 Mae 1976

A-raok Pask e lavare din ur c'hatekizour edo c'hoazh ar c'hiz en e daolead lakaat da darzhañ ur Judaz Iskariotez plouz da sul, evit klozañ ar Sizhun Santel. Sed aze, a soñjen, ur pezh kaer a sulvezh Pask. Teurel ar bec'h war an trubard ha gwelc'hiñ an daouarn evel-se. A-barzh lakaat an tan ennañ e vez lennet e destamant, aozet gant renerion ar bloaz, e-pad noz Gwener-ar-Groaz, mesk-ha-mesk gant gwer ha botailhoù. A belec'h e teu ar c'hoari-se ? En ul levr nevez embannet "Le Mexique des Indiens" e tanevell Marino Benzi, an oberour anezhañ, doareoù ar Chapayekaed, da vat o lidañ ar Sizhun Veur. Amañ ivez ez eus da Judaz doare ur paotr plouz, paotr plouz an Ened e Breizh. Goude marv ar C'hrist e teu an abostol da vezañ da vezañ c'hoariere pen-nañ ar gouel. Ezañs zoken 'zo kinniget dezhañ; o den-meur an hini eo. Setu avat a-greiz-holl ur soudardo teredek da embann keloù an dassorc'hidigezh : savet eo a varv da vev an den-sorser lazhet ganto. Spont ha strafuilh gant ar Chapayekaed. Divizout a reer petra ober gant Judaz : muntret e vo evit ma c'hall ar C'hrist bevañ e trubard hag evit ar wech diwezhañ e tibunont di-razañ. Goude, tan er paotr plouz, ha devet gantañ ar maskloù, ar profoù ar sabrennoù. Bremañ e c'hall ar c'hleier seniñ da embann d'ar bobl keloù mat an Dasorc'hidigezh.

Sul 23 Mae 1976

Pa gejer gant Latinamerikaned, ergerzhourion en Europa, e torr warnoc'h o hegarated. Tud chik, a lavarfe ur Vigoudenn. Tud chik, siwazh,

dezhio krabanoù bourrevion. Dont a ra brud vil da Chile, Uruguay, Brazil : prizonidi liv ebet mui anezho, korfoù muturniet stlapet war an traezhennoù, hiniannoù aet diwar wel, roud ebet mui anezho. Tud div zremm dezho ?

Per-Jakez Heliac en deus diskleriet da PANORAMA AUJOURD'HUI, genver 1976. "Emañ ar yezh vrezhonek o vont da goll ; d'an traoñ ed a e-touez ar werin ha, dreist-holl, war ar maez. Gwir eo, d'an hevelep koulz en em zispak un emsav kefredel o teurel pled gant ar brezhoneg. Maz eus avat brezhonegerion er bloaz 2.000 e vint kefredourion ; me va-unan a zo ur c'hefredour hag ur bourc'hiz, dav eo din henn anzav. Ur yezh oc'h en em gefredekaat a zeu da vezañ sec'h ha skornet, e-giz pa vije aet d'en em sichennañ en ur mirdi bennak."

Ar "marc'h-ourgouilh" m'eo Jakez Heliac a oar gwelloc'h egedon petra ' zo berniet e Kastell Pont 'n Abad. E vouezh tomm eo a dregern e mirdi korn-bro ar Bigouden, war an alar daou zorn, ar billig vras, ar c'hoef-blev, ar falc'h, al letern-kraou, ar gwele-kloz. Ma, ar yezh difennet gant paotr Pouldreuzig a ya mat-tre gant ar pezh a zo miret e kastell baroned ar Pont. Setu perak ne c'hallan ket bezañ a-du e doare ebet gant va c'henrannvroad. Va brezhoneg a zle, kousto pe gousto, kanañ, danevellañ, taolennañ Breizh ha Breizhiz 1976. A-hend-all, ya, istribilhomp hor yezh en ur mirdi gall bennak ha peoc'h d'ar jeu ! Boulc'hurun ! E brezhoneg glan e fell din lavarout "construction aéronautique, construction automobile, construction électrique, construction mécanique, construction navale" h.a. Sec'h pe get, ret eo din debrñ ar bara-se !

Yaou 27 Mae 1976

Un tammig tachenn am eus du-se, war dreuzoù bourc'h Kombrid, Park ar C'hornigelloù hec'h anv. Hag an deizioù-mañ e c'houlenn ar maer diganin

lezel ur vevennig da vont gant hent Kemper emeur e soñj ledanaat hag eeunaat. En va respont e kred an lavarout dezhañ sellout e pe stad eo lakaet parrez va c'havell. A-barzh pell, ne vo mui nemet ur roued a hentoù koltaret ; muioc'h anezho eget a zouar ha dreist-holl a zouar-labour. Du-mañ emañ da vat o ren 'Breizh-an-tachadoù-glas', gourvezvank evit tud "skuizhet" kêrioù ar Gall ha kêrioù Europa. Hentoù ledan da vont d'ar stêr, hentoù frank da vont d'an tevenn, meurhentoù da vont da Enez-Tudi ha da Venoded. Erfin, petra a chomo a c'hlas ha na vo ket troet da zu ? Erfin, daoust ha chom a ray c'hoazh un tamm douar bennak etre daouarn Bigouden Kombrid, etre daouarn Brezhoned ? Da biv eo ar manerioù, da biv an tiez-hañv, da biv al liorzhoù, garzh start endro dezho, da biv, a c'houlennan ? Dizale ne vo mui hor broad nemet ur c'henstroll a inizi speurrenet ! Inizi estrenion savet ganto o eden, difoutre, diseblant ouzh ar pezh n'eo ket o baradozig, prenet gant o arc'hant bras. Mallozh dit, Brezhon, hag a zroukro HON douar ! N'eo ket dit ar glen-se : dimp-ni eo.

Gweper 28 Mae 1976

Klevet em eus en deiz all e oa dileuridi eus an I.R.A. o kemerout perzh e obidoù an anarkourez-se eus bandenn Baâder, en em grouget e toull-bac'h Berlin. Daoust hag ar banniel du a zlefe kemerout lec'h ar groaz keltiek en Iwerzhon ? Petore arouez eo ar muiañ dispac'hel ? Hag e Breizh ? Steredenn Lenin a vefe dispac'husoc'h eget kalvar hon hendadoù ?

Yaou 17 Mezheven 1976

"Goulennet em eus hollen e holl stalloù ar vourc'h," a lavar din ur paotr yaouank, hag ar respont, dre-holl, ' zo bet 'nann' ! A ! Bremañ e sav soñj din : du-se, e Putina, " (emañ Putina war an uhelgompezennoù) "ne werzhent morse hollen, erru an noz du anezhi..."

Ar pobloù paour... merzet hoc'h eus ? Pobloù dilunedoù ! N'ouzont ket lenn. N'eus ket paper da lenn ; n'eus ket arc'hant evit mont da welout al lagadour. Amañ n'eus netra war fri ebet.

Deuet eo er-maez eus tiez-bac'h Arc'hantina va mignon Jakez Renevot, beleg eus ar Yeuc'h ha FIDEI DONUM evel don. Kraouiet adal miz Du 1975 e skrivas dezhañ ur wech e brezhoneg. Respont ebet. Keloù am eus bet abaoe ez eas va lizher betek ennañ e botez ur seurez. Ger ebet avat n'em eus bet digantañ : reolenn an toull-bac'h ha yec'hed an den. Aet e vefe ar paotr da netra ; petra ' zo bet graet dezhañ ?

#### Gwener 2 Gouere 1976

Douar ha douar gant hon departamant emañ hini MADRE DE DIOS.

Du-se eo kalz tommoc'h ha kalz kompesoc'h eget amañ. Hag ouzhpenn, n'eo ket c'hoazh stank an dud. Stag eo avat al Levierzh da glask metaloù er c'hondon hag e sell da se e stag hiniennoù da zivroañ di, dedennet gant goprou a soñj dezho bezañ fonnusoc'h. Antonio a gonte din nevez zo penaos e vez diskontet d'ar vicherourion 15 lur bep 45 devezh, evit degas dezho ur c'hast eus Lima pe a lec'h all. Ha mat pell zo ! Emski-antek pe diemskiantek, pep hini a roio peoc'h. Gastaouiñ war ar c'hevandir-mañ ne vir ouzh den ebet a gousket dous. E Juliaca, ar gêr vras an nesañ ac'hale, e lavare din ur paotr yaouank, ez eus tri rumm a c'histi : ar re cheuc'h, uhel ar priz ganto, ar re giz kêr met chomet moustrouilhenn, hag ar re e koef, evel ma vefe lavaret e Breizh ; ar ploukezed gant "pollera", gant lostenn ha tog-meloñs a zo, eveljust, ar rumm izelañ.

#### Sadorn 3 Gouere 1976

Hiziv, er wenodenn, on chomet da sellout ouzh c'hoarioù ar c'hizhier-koad, heñvel ouzh

re Vreizh, gant ul lost un tammig berroc'h mar-teze. A-wechoù e soñj din bezañ o pourmen pe o klask togoù-touseg e koadoù pin Kombrid. A! Pa vezent kutuilhet evit gwerzhañ d'an dud cheuc'h e veze peget warno un anv dereatoc'h : 'chañpi-gnoñ', neketa ! hag e bro ar Bigoudenned ne ouied ket envel ar c'hazh-koad ; ar skol c'hall he doa degaset dimp abaoe pell zo an "ekoureuilh" pe un dra bennak damheñvel.

#### Sul 4 Gouere 1976

Pevarzek vloaz zo ez eo bet savet Yanawaya da bloweg ha gouel a vez lidet d'an 29 a viz Mezhven. Amañ avat ne vez morse a-walc'h gant un devezh. D'an derc'hent e stager, d'abardaez, gant dibunadeg ar gouloù, e karg bugale ar skolioù. Ret eo da bep hini fardañ e letern, gwintet e beg ur vazh hir. D'an ijin da vont en-dro ! Plijet en deus din un 'alpaka' hag ur morvleiz. Ne rae ket diouer ar c'hirri-nij, un dra, koulskoude, ha na dreuz morse hon oabl dimp-ni.

Lazhet ar bouji, foeltret al leternioù paper, e chom an noz da dremen. Tro-dro d'al leur-gêrig o deus ar merc'hed staliet o zaolig hag enaouet an tan evit birviñ al laezh. Laezh gant "hini kreñv" a zo mat evit stourm ouzh freskter an noz ha trec'hiñ ar c'housked. Mat ivez evit sikour tapan ur reoriad. Evel-henn e tizher tarzhan-deiz, sevenet strizh giz ar beilhañ ; ur c'hiz droch ha dismantrus, maz eus unan. Kozh-douar eo ar pec'hed ha yaouankizoù Breizh, war hentoù al lun vintin, en o c'hirri cheuc'h, mesklet o izilli berv, a zo ken kozh ha koshoc'h c'hoazh eget tudennoù an Andou. Ur c'hiz a zo ivez ganto ha dezhi ivez int sklaved.

#### Merc'her 7 Gouere 1976

'Mall eo gwelout derc'hel kont eus kentelioù an istor, eus gwir ar poblañsoù da ouarn o doare-int o-unan. Oc'h ober departamantoù eus o inizi

ne vo tizhet nemet o c'has buanoc'h war-raok en hent ma kollont warnañ o spered pobl diforc'h, un hent m'int loc'het abaoe ur pennad amzer, e-giz maz eo anat kaer e-touez Poluneziz ha Melaneziz Kaledonia.

"Ma fell d'al Levierzh en em ziskouez evel an diwezhañ galloud trevadennel er Meurvor Habask, goude bezañ embannet d'ar seizh avel e oa-eñ e penn ar stourm evit didrevadennañ, ar gwir en deus d'henn ober, eveljust ! Ur c'hristen avat ne c'hall ket chom diseblant oc'h arvestiñ ouzh distrujidigezh ur c'henel, ouzh lazhidigezh ur stuzegezh, ma vefe ar politikerezh-se kiriek dezho... Bresk eo ar bihanniveroù ; ar re greñvañ avat a denn bepred o mad eus al lezenn. Tahiti a zeufe da vezañ Honolulu ? Ha mont a raio da get Melaneziz o tilezel o youl-vevañ ?"

Se a lennan dindan bluenn Loeiz Brain e 'PEU- PLES DU MONDE', niverenn Ebrel 1976. Skrivañ a ra ar C'hallaoued traoù kaer-meurbet a-zivout ar re a zo du-se 18.000 kilometrad diouzh Paris. Ha mat e reont. Met n'int ket reizh penn-da-benn. Ma n'int ket dall, int born-grôñs. He dremm he deus Breizh. Kement ha muioc'h eget Tahiti. Dislivet, dinerzhet, divouedet, strewet eo hon tudad. Pask ne gan nemet e kalon un toulladig.

Gwener 16 Gouere 1976

N'oc'h ket bet morse er skol ; ne lennit ha ne skrivit nemet o termal ; n'hoc'h eus ket gal-let mont en tu all d'ar c'hentañ derez ; chomit da louediñ er c'hazarnioù, a-hed daou vloaz. D'ar re baourañ da dremen ar muiañ a amzer pell diouzh ar gêr. Nebeutoc'h a zivrec'hioù er park, priedoù yaouank disrannet, a-boan kemeret ganto o lañs. Amañ ivez evel e Breizh n'eus ket gwall bell 'zo, ez eus tadoù hag a soñj dezho n'eus ket gwelloc'h eget ar servij evit evit dibradañ o mibion. Etre-vroadel eo ar soñjoù droch-pilh. Antenor Uchamako paket bloaz zo en Arequipa, a redo d'ar gêr e miz Gwengolo evit dimeziñ dirak Doue hag evel-se en em

zisammañ eus c'hwec'h miz koñje. Un hanter vloaz a vez krennet d'ar soudarded hag a c'hall kinnig ur skrid-testeni eus o eured iliz pe o eured ti-kêr. Ne gomzer ket mui eus servij ar merc'hed. Merc'hed koefet, lostennet, plezhennet, dieub o bronnoù ha divragoù o gaol !

Sadorn 17 Gouere 1976

War ar c'hevandir-mañ n'eo ket diaes kaout aotre da lakaat ur skingaser da vont en-dro. Darn a gomz, a son ha, dreist-holl, a gan, mintin ha noz ; darn all e-pad un nebeut eurioù nemetken. Diwar goust an tarañverezh e padont ; bruderezh dalc'hmat evit na hevelep stalioù, an hevelep embregerezhioù, an hevelep kenderc'hadoù ha mar-c'hadourezhioù. N'eus ket kalz war ar roll, me ! lar deoc'h : ar re c'halloudusañ, paotred un un-werzhouriezh. Splann-tre e klevan skingaserion vBolivia ha bemdeiz e teu AIR FRANCE gant e ziskan : "Deuit da lakaat hoc'h anv... Dizale e vo un nijadenn davet Taïlandia !" A-dra-sur e ra berzh ar Gompagnunezh cheuc'h-se peogwir he deus he stelig e La Paz. Berzh gant piv ? N'en deus ket c'hoazh tarzhet an deiz ma vo gwelet kouerion ha men- gleuzierion melen uhelgompezennoù hag izelvroioù. Bolivia o vont da ober ur gwel da annezidi velen ar Vro Taï !

(Da genderc'hel)

+++++

DEIZLEVR YOUENN TROAL ER PEROU

Ken dalc'h

Yaou 22 Gouere 1976

Dilun, evit ar wech kentañ, on bet o kutuilh kafe. N'eo ket ken tenn ha ma soñje din dastum ar boulligoù ruz-tan-se. Daoust deoc'h da gaout bepred ur pav uheloc'h eget egile, dre maz eo ar park evel diribin an doenn vrezhon.

E "CONNAISSANCE DES JEUNES NATIONS" niverenn Gouere 1976 emeon o paouez lenn ur pennad gant Anne Bramard-Blagny diwar-benn C'hivaroed Perou, un 10.000 bennak anezho, o vevañ a-ramp war harzoù Perou hag Ekwador. "Petra ' teuint da vezañ," emezi, "gant o hengounioù hag o c'hredennoù a-dal d'ar misioner - ur protestant - na fell mui dezhañ e ve kanet luganoù an amzerioù brezel, e vefe korollet, zoken e vefe evet ar 'masato' ? Un evaj alkolek eo ar 'masato'-se, graet gant maniok, chaoket gant dent ar merc'hed, mesket gant o halo ha lezet da c'hoiñ. Setu ! Tud hag en em blij er c'hrizder, er feulster, tud hag a stroll bepred ar c'horoll gant ar mezvierenzh. Ha da heul ar mezvierenzh, bazhadoù, kannoù, lazhoù gadaliez h.a. ... Tud, ar c'hiz ganto a evañ ur braoued ez eo dav dezhañ bezañ goet gant tuf ha dent, daoust ha ret eo o lezel e-giz m'emaint evit ma vefent ar pezh maz int ? D'an ampoent ez eus e Breizh un alkoolegezh gwisket gant pilhoù all ; anavezet em eus avat alkoolegezh an "toulloù li", hini ar chistr hag al lambig. Daoust ha ret eo plantañ avalennoù all ha fardañ podhouarnoù lambig nevez evit kaout doujañs e-keñver

ar vreizhelezh pe henn adkavout gant he glanded kentañ ? Penaos krediñ e c'hallfe ar C'hrist hag e Ilizgoulenñ digant un den, - digant an den C'hivaro aberzhiñ an disterañ neudenn vat eus danvez e vuhez ? Faziet o deus kristenion an tremened o vougañ, o tismantriñ, o paouraat. Evelato, da betra e talvezfe an Dieuber Meur ma ne dorrfe ket an neudenoù fall a zo ereoù o wastañ buhez vab-den ?

Gwener 29 a viz Gouere 1976

E 1762 e werzh Loeiz XV Gallaoued Loeizania, int-i hag o douaroù, da Roue Spagn, e genderv. E 1800 int daskoret da Vro-C'hall. Tri bloaz war-lerc'h, setu int gwerzhet adarre, gant Bonaparte, d'ar Stadoù-Unanet evit pemzek milion a zolarioù. Ur milion ez eus anezho hiziv an deiz. Meur a hini eus o c'hentadoù a veve gwechall e Akadia, Kanada hiziv, gwerzhet gant ar C'hallaoued d'ar Saozon. Adal 1921, evit peurgas da benn unded ar Stadoù-Unanet, n'eo aotreet nemet ar saozneg er vuhez kefridiel. Un nebeut bloavezhioù zo avat ez eo degemeret ar galleg adarre evel eil yezh ar stad loeizaniat.

Petra a erruas avat, e-doug ar prantad-se a zistaol ? Gant ar gelastrenn e veze boureviet bizied ar skolidi "cajun" - lezant roet d'ar c'hallegerion-se - pa vezent paket o c'hallegeañ kenetrezo, pe neuze e vezent sammet gant pemp kant linenn da adskriñ. Yezh ar re ouez, ar re zivarlerc'hiet, ar re baour e oa ar galleg. Deuet e oant da gaout mezh gantañ. Evelato, ouzh taol, er gouelioù niverus, e padas yezh ar "plouked". Hag hiziv, penaos emañ ar stal ? Betek peur e vo komzet galleg er Stad norzhamerikat-se ? Petore emzalc'h e vo hini ar re yaouank ? Skolveuridi a respont : "Hon tud a gomz ouzhimp galleg ; e saozneg ec'h eilgeriomp. Ne gomzer ur yezh nemet ezhomm a vefe anezhi er vuhez. E-kreiz ur c'hevandir divent emaoamp-ni

amañ, hag ouzh n'eus forzh peseurt tu e troomp, e komzer evel ma reomp, e vever evel ma reomp, giz Amerika. Amerika eo a ra diouer dimp..."

Saviad heñvel e Breizh o tisoc'hañ war un emzalc'h heñvel. Gant tud n'ouzont diskanañ nemet "Da betra e talv?" ne c'haller mont da du ebet, paneve nemet da hini ar c'hof hag ar gwele.

Un 'emsav' ez eus e Loeizania, abaoe un toul-lad bloavezhioù. Lufur ' zo adroet d'ar galleg gant ur bihanniver, en e benn un alvokad, diazezet gantañ ar 'c'hCODOFIL' ('Comité pour le développement du français en Louisiane') Ganr ar gevredigezh-se ez eus 60.000 skoliad war ar studi. Da Vro-C'hall e teu hinienoù eus ar re-se da wellaat o galleg. Ha skritelloù a beger : "Bezit diouzh ar c'hiz : distagit galleg ! "

Yaou 5 Eost 1976

Evit ar wech kentañ ez eus ur vaouez, ur gelennerez, e kuzul-kêr Dan-Juan-del-Oro. Nevez zo edo ar strollad o tivizout diwar-benn priz ar bier. Seizh 'soles' warn-ugent a c'houlenne ar maer. - "Feiz, n'eo ket a-walc'h, "a zisklerias an izili all ; ret eo reiñ talvoudegezh d'ar bier : lakaomp tregont 'soles'..." (Ar 'sol' eo ar moneiz perouat) "tregont soles enta war an deiz hag hanter-kant diouzh an noz..." Tortadoù marc'had-mat, nann ? Lufur ha startijenn dezho !

- Penaos 'ta sevel Perou diwar e deil ? " a soñjas hag a lavarar ar guzulierez nevez.

Per ar Gall a skriv : "Ur sec'hor spontus a zo o kas e reuz abaoe mizioù hir. Bremañ e seblant bezañ torret d'e lañs, a-drugarez d'an arnevioù hogos pemdeziek, evit brasañ nac'hamant an douristed. Re ziwezhat eo, gouez da Yann Gouer : kollet da vat eo ar maiz hag ar gwinizh eo ken truezek all ar stad gantañ. Da varn diouzh va leton aet da dorch-treid, ne zle ket chom kalz

a zour e douar ar parkeier hag ar pradeier. Soñj 'ta ! Ar gozed, gant an disec'h m'emañ o c'horz-ailhennouigoù, a zeu war-c'horre an douar da gl'ur banneig bennag da evañ hag un tamm bennak da zebriñ, gant an diouer a vuzhug aet Doue a oar da belec'h ! Amañ e vo dour a-walc'h ganimp e-pad a hañv, dre eurvad, ma n'eo ket foranet gant an dupe wastet gant ludu-chimik al labourerion-douar. Ur stankell a zo bet savet nebeut zo, e Kerniliz, da reiñ dour da Wiseni, Plougernev, Gwitalmeze, hag all, met evit ar mare n'eus nemet Plougernev a zo bet adkorzennet ouzh ar mirlec'h-douar nevez. E Sant-Brieg, Sant-Malo ha lec'hioù all er reter, e vez pourchaset an dour d'an dud gant kirri-sam ha korzennoù lem-laka abaoe pellzo.

Ya, Per-Jakez Helias a zo oc'h ober berzh gant e v'BUGALE AR STARTIJENN, da vezañ embannet a-benn diwezhar bloaz gant ... ti-embann PLON !! Graet en deus ur berzh souezhus ha sebezus, dreist-holl, d'am soñj, en abeg d'ar bruderezh savet en-dro dezhañ. N'eus ket bet kement a drouz ar bloavezhioù all, gant ar priz "AUJOURD'HUI" kinniget da B.J. Helias hevlene. Ar vurutellerion ar gazetemerion a bep gouenn hag a bep liv, n'eus ket bet a-walc'h a veuleudioù ganto evit ul levr talvoudus, a-dra-sur, met ket, d'am ali, ken del-lezek-se da zegas d'e saver ouzhpenn daou-c'hant milion kozh ! En abeg da betra kement-se ? Dalc'h mat diouzh va ali, dre ma seblant ar skrivagner asantiñ da varv ar brezhoneg, daoust ma lavar ar c'hontrol amañ hag a-hont, met en un doare disteri a-walc'h, dre ma asant da vezañ gall, hep burutellañ ar Stad C'hall evel m'emañ diazezet, dre ma ne ziskouez e neb lec'h ar vrogarantez a zo lod an holl Vrezhoneg c'hanet mat. Gant LE CHEVAL D'ORGUEIL, ar Jakobined a zo en o bleud. Bremañ, hag un dra vat e vefe, marteze an dud, e sav eno ur seurt hiraezh d'an amzer ma ne oa nag ar pellgomz, nag ar skinwel, na gement a girri-tan... nag ijinerezh nukleel !

Lennet em eus e-barzh LE MONDE ur pennad-skrid a-zivout da vignon Jakez Renevot. Sur eo n'eo ket plijus bevañ bremañ e Su-Amerika, evit ar re, ac'hoel, a nac'h plegañ dirak ar renerion. Ar boureviadur, siwazh, a zo oc'h en em ledañ bep un tammig dre ar bed a-bezh, ha n'eo nemet evit kreskiñ, aon am eus, gant ar boas maz eo deuet an dud da vezañ outañ, dallet maz int gant un emgarantez spontus. Daoust ha ne vefe ket re bo-blet endeo ar voull-bri m'emaomp o vevañ warni ? Ar razhed, am eus klevet, pa vez re anezho en ul lec'h bennak, en em dag, en em zispenn, en em lazh kenetrezo... Daoust hag ez omp ken disheñvel-se diouzh ar razhed ? N'on ket sur. E-barzh LE MONDE c'hoazh, ez eus meneg ar mintin-mañ, eus darvoudoù c'hoarvezet e Lima. Spi am eus e chomo sioul memestra an tolead m'emaout o vevañ enañ.

Ha petra a nevez c'hoazh ? Morgousket eo Breizh, daoust maz eus bet un darzhadenn e burevioù an E.D.F. Tours, ma vez miret enno dielloù ar C'hreizzennoù Nukleel evit broioù ar C'hornog. Gant an FLB-ARB eo bet graet, a lavarar... An dieubidigezh a zeuio, marteze, eus Korsika maz eo bet feuket-bras an dud gant barnedigezh E. Simeoni hag hini Cacciari a oa bet, sañset, lazhet ur CRS gantañ.

... Gwelet em eus nevez zo, avat, Goulc'hen Kervella, bepred an hevelep hini ha bepred oc'h ober war-dro ar c'hoariva brezhonek. Spi am eus e welout, un tammig muioc'h, e-pad an diskrog-labour, o vezañ m'emañ hor soñj mont a-gevret da besketa gant va bag vihan war an Aber-Ac'h." (Lizher eus an 13/07/1976)  
(Da genderc'hel)

+++++



DEIZLEVR YOUENN TROAL ER PEROU

Kendalc'h

Yaou 5 Eost 1976 (kendalc'h)

Mar ne fazian ket, eus kostez Lille eo Perig Herbert, anavezet mat e bed ar sonerezh. Yeun ar Go a lavare din e oa div wech gall person Gouezeg, person e barrez. Ma, lavarout a ran ez eo Perig div wech brezhon, daoust ma n'en deus gwizienn ebet nag en Arvor nag en Argoad. Dont a ra gantañ brezhoneg sonn, kiget mat gant an tremened hag an dazont. "N'ouzon ket," emezañ, "ha keloù ac'h eus bet, nevez zo, eus an darvoudoù er vro-C'hwec'hkogn. War dachenn "kudenn ar rannvroioù", e-giz ma lavar pennoù-bras ar gouarnamant hag ar strolladoù politikel gall ez a an traoù un tammig war well, a hañval din. E Korsika hag e kreisteiz Oksid tania, da vihanañ. Evit hor paour-kaezh Breizh, siwazh, n'eo ket ken brav na ton hag ar son. Da zifenn ur c'houer taolet er bidouf ez eo en em savet "Kreisteiz argwin" en e bezh, a-dreñv banniel ar broioù Ok. Du-mañ avat, ha paket ouzhpenn daou-ugent a dud koulskoude, n'eus bet nemet "petitionoù" ha n'o deus ket graet kalz berzh..."

(Lizher an 21/06/76)

Meurzh 17 Eost 1976

Disadorn e oa eured Crecencio hag Eusebia, daou Getchoua yaouank o kenvefañ abaoe tri bloaz zo ha dezho ur plac'hig. Patrisia hec'h anv. Ne seblant ket gwall viirvidik al liammoù etre kerent. Pe neuze ne zeuont ket war wel en degouezhoù ma teu hor re-ni. Er chapel, liv ebet eus tad ar mab nevez ; liv ebet eus tad ha mamm ar verc'h nevez. Edont avat e kêr gCrecencio, unan

gant e zilhad bemdez, ur banne dindan e fri, da vat o peurechuiñ un tammig toenn follennoù houarn ha follennoù plastik gwintet war gefioù sanket en douar, harp an ti-soul. Egile a oa azezet ganimp ouztaol ar friko ; e wreg avat, mamm Eusebia, a erruas diwezhat, hep ma vefe he dilhad cheuc'h warni. Troet on da soñjal ez eus muioc'h a reuz hag a zrailh etre an dud paour ha reuzeudik eget ez eus etre an dud pinvidik ; ar re-mañ n'o deus ket ezhomm kement d'en em gannañ evit o zamm kreun. Urzh a zo ganto ha pep tra bevnet strizh.

Klevet em boa komz endeo eus an doare savadur-se. Met soñjal a raen e oa ur seurt logell a enor evit reiñ ton d'an dud nevez. An deltenn-se a vefe kentoc'h un dra ret, evit reiñ bod d'an dud pedet d'ar friko ha d'ar re n'int ket pedet. Rak kement hini a zeu da astenn e fri en deus ar gwir da gaout e blad hag e vanne. Ma vez kinklet ar postoù gant delioù palmez hag ur vleunienn bennak, ez eo muioc'h, d'am meno, evit 'kuzhat ar vizer', e-giz ma lavarar er vro vigouenn, eget evit ober gouel. Dindan an dinell-se, war an daol hag a-us d'an daol, istribilhet, div blantennig c'hlas o gwrizienn wenn nevez kizellet, ur penn hag ur beg dezhi. Setu eta an div goulmig, arouez ar garantez, kement anv anezho e kanaouennoù hag e barzhonegoù poblek an Andou.

Diaes envel ur friko ur pladad soubenn, un tamm kig yar gant riz hag un tasad kafe ; ne vezer ket seizhdaletoc'h o tistaliañ pep tra. N'ouzon ket c'hoazh penaos eo tremenet abardaez an eured-se ; karet em befe ne vefe ket bet tomm da zen ebet rak droch-tre ha feuls peurvuiñ e vez ar vezventi dre amañ.

Merc'her 18 Eost 1976

N'ouzon ket hag anavezet eo gant ar vroadelourion Loeiz-Mari Xirinacs. D'an ampoent emañ adarre e-barzh an toull-bac'h ha n'eo ket ar wech kentañ dezhañ. Nac'het en deus paeañ un

tell-kastiz a vil "peseta", tapet gantañ, dre ma ne fell ket dezhañ ober e ziskleriadurioù e spagnoleg dirak ar varnerion. Xirinacs, ur c'halatan, ur frañsiskad ha barzh dispac'hus, a zo breur d'hor c'henvroad Yeun Gourvez, o talmat gant e vrezhoneg e lezioù-barn Pariz.

D'ar 25 a viz Gouere ez eo aet ar Roue Juan Carlos da gCompostela, evit seveniñ ar C'hinnig Broadel d'an Abostol Sant-Jakez. Skrivañ a ra ar gelaouenn VIDA NUEVA, niverenn 1041, gouere 1976 : "Perak 'ta n'eo ket bet graet, e-kerzh pedenn ar fideled, un nebeut azgoulennoù e gallsianeg, evit lakaat anat emañ an Iliz, eus don he c'halon, a sevel a-du gant gwir ar bobl?" D'an hevelep deiz e tistagas ar roue un toullad komzoù e yezh C'halisia ; n'edo ket ar vroadelourion avat war e dro. Hep aotre lezennel e fellas dezho lidañ an "dia patria galega".

En hevelep niverenn eus VIDA NUEVA ez eo bourrus-tre lenn nav fajennad diwar-benn ar Jitaned "Alleluia", Jitaned o vevañ e Bro-Spagn. Anat eo ez eo paket, koulz lavarout, an holl dermajied spagnolat e roued al luskad pantekostek. Piv 'ta en deus prezeget ar Feiz nevez-se ? Ur brezhon an hini eo, ur Bigouter, a zo gwelloc'h ! Ur "marc'h-ourgouilh" war ar marc'had : Klemant ar C'hoseg, 56 vloaz, eizh bugel dezhañ, 'genidik a Vreizh c'hall' (sic!), katolig troet da brotestant... E 1952 e oa lidet gantañ e Brest ar badeziantoù kentañ. Adal 1959 ez eo amkan al luskad gounit da Zoue, d'an Aotrou, Europa, Me-c'hiko, ar Stadoù-Unanet, India... ha Spagn. E 1973 e tibabas ar pastor ar C'hoseg tevennoù Plouneour-Trez evit "Emvod-Meur Etrevroadel" an "Iliz" diazezet gantañ. Gwelet ha selaouet em eus en hag e heulierion. Un dra iskis-groñs : Feiz ur Bigouter pe dornataerezh "tud ar veaj" ?

Gwener 9 Gwengolo 1976

Ya 'vat, betek amañ e teu bremañ ar c'he-laouennoù porno-grafek, d'an tiez-soul pellañ hag uhelañ war diribinoù ar menezioù. A-walc'h eo d'ar paotr yaouank mont da glask labour er c'hêrioù bras. Tennañ a ra anezho eus strad e valizenn goad. N'eo ket merket e pe'vro int bet moulet. Hervezañ e teufent eus Chili.

- Petra emañ e soñj ober gant ar paperoù-se ?

- O gwerzhañ d'ar re all," emezañ ken di-check ha tra, ken leal ha tra ivez. Da forzh piv n'eo ket dindan un nozvezh e teu dezhañ koustiañ sklerijennet.

Badezet eo e vabig Anc'hel gant Saturnino. Met pebezhañ penn 'zo outañ ! Sirius evel un Doktor eus an Iliz e tistag ganin :

- Va gwreg ha me a rank bremañ mont an eil ouzh egile rak ne c'hallan ket bezañ dimezet gant va c'homerez (mamm-baeron ar bugel). Er broioù-mañ e soñjer ez eo ur pec'hed n'eus pardon ebet dezhañ bezañ pried ur paeron pe ur vaeronez. Hogen d'an ampoent emeur o kemmañ ar c'hiz ; d'ar gerent eo, da gentañ holl, emellout ouzh feiz o c'hrou-adur ; dezho eta sammañ an danvez-badeziad. Ur gredenn laoskaet a c'han ul lid dirapar hag ul lid dirapar a c'han soñjoù direizh e klopenn ar feizidi.

Meurzh 14 Gwengolo 1976

Gant darn eo bet graet eus Ernesto Cardenal "sebezusañ renevez ar varzhoniezh latinamerikat goude Pablo Neruda." Dont a reas er bed e 1925, e Granada, e Nikaragwa. E Mec'hiko hag e New-York e reas studioù skolveuriek war ar brederouriezh hag al lennegezh. War-dro ar bloavezhioù '50 emañ distro d'e vro, evit en em ouestlañ d'an obererezh politikel. Ha kemer a raio perzh e "irienn viz Ebrel 1954" a-enep d'al levier Somoza, Ennañ e oa bet fiziet ar gwashañ kefridi ; mont da heul Somoza adal Kannadti Norzhamerika e-lec'h ma oa gouel, betek

dorioù ar palez ; eno e oa en o soñj tapout peg el Levier ha pakañ krog er stur en e lec'h. Iri-ennerion e-leizh ne oa ket ha setu ma c'hwitas an taol. Dav e voe daleañ ar skrapadenn betek an deiz war-lerc'h ; unan avat eus an dispac'herion a voe paket ha boureviet. Dont a ra Somoza da c'houzout emeur o klask e deurel d'an traoñ ha reiñ a ra urzh tapout krog en oberourion bennañ ar steuñv chomet berr gantañ. Toullbac'het eo ar renerion, boureviet ha, goude, drouklazhet. En em gaout a ra E. Cardenal da dec'hout ha d'en em guzhat. N'eo ket gwir e vefe bet dalc'het en ur c'hamp-bac'h, e-giz ma lavar ur bern tud. "Ebrel avat, e Nikaragwa," a skriv ar barzh, "eo miz ar marv..." Emañ neuze o komz eus e geneiled e-barzh an irienn gantañ.

E 1956 e teu ur c'hemm groñs en e vuhez gouestlet d'ar varzhoniezh. Dilezel a ra an 'harz-erezh' ('resistañs'). Santout a ra ez eo ret dezhañ perc'hennañ Doue. Evit se avat e soñj dezhañ e rank a-grenn en em zistagañ eus pep tra, en em ziberc'hennañ diouzh pep tra. Un dra hepken 'zo dezhañ: ar varzhoniezh. Rak-se 'ta eo lakaet en e soñj bezañ diseblant-krenn ouzh skrivañ pe chom hep skrivañ. Hag ez a da vanac'h en un urzh na ra ket foeltre eus al lennegezh : hini an Drapidi, e abati Itron Varia Jetsemani, e Kentucky, er Stadoù-Unanet. Gant notennoù skort e rank chom ha n'eus ket aotre dezhañ skrivañ barzhonegoù. Ar manac'h-barzh Tomaz Merton eo e vestr danvez leaned, e-pad an daou vloaz tremenet gantañ er manati. Kentelioù hemañ ne vint ket ankounac'haet gant Cardenal ; gantañ e tesko enebañ ha tamall en e holl werzennoù, evel ma ra ar Brofeded ; deskiñ a ra gantañ ivez ne c'hall ket ar manac'h zoken en em zisran-nañ diouzh an emouestl politikel. O komz diwar-benn Cardenal e kred Merton skrivañ krak ha berr : "Ar galv a-berzh Doue a zo bet e hini n'eo nemet ur stumm kevrinel da vezañ tostoc'h ouzh an dud, ouzh kudennoù Amerika Latinek, ouzh ar gaezhnez hag an direizhded hollvedel. Ma ne vefe ket e-giz-se e vefe faoz ar gevrinouriezh, - ematizezh ha

'tec'hadegezh' ne vefe ken..."

Merzet mat-kenañ en deus E. Cardenal ez eo an dehouelouriezh hag ar gleizelouriezh, an dispac'h hag an diktaturiezh, darvoudennoù speredel kentoc'h eget gwirvoudoù politikel. Ne baouez ket a vourrañ er politikerezh met sellout a ra outañ gant daoulagad disheñvel. Anat eo ez eus ur sklerijenn nevez o parañ war e vuhez ; ar c'homzoù-mañ skrivet e 1957 henn diskouez splann : "Evel boestoù bier goull ha lostoù sigaretezennoù devet, evel dremmoù o tremen dre skramm ar skinwel hag o steuziañ, - evel-se e tremenas va buhez... Kement tra a zo bet karet ganin betek-vremañ he deus ehanet a gaout talvoudegezh evidon..."

"Gethsemany Ky", un oberenn nevez skrivet ha peurechuet gantañ p'edo o vevañ er manati, a zo labour daou : Tomas Merton ha Cardenal. Ren a ra ar barzh ur vuhez kevrinel ; e werzennoù avat n'int ket kravezel war-eeun. A-dreuz tezennoù politikel, kevredigezhel, armerzhel nemetken e tiskouezont bezañ relijiel ; livañ a reont ar gwirvoud war an hevelep tro evel tra bolitikel, armerzhel, kevredigezhel, kravezel ha kevrinel. En e varzhonegoù e tistaol diehan an nerzh, ar vestroniezh rok hag ar galloud brezelgar ; pe, dibaouez hag ingal, e kan ar garantez evit Doue, - pezh a zo heñvel evitañ. Rak krediñ a ra Cardenal ez eo heñveldra klask. Doue ha klask ar reizhded hag ar peoc'h evit an den. Evitañ, sioulded ar gouent a ya da heul garmoù an nerzh, galloud an armoù, an araezioù-kehentiñ ha pleustrerion ar c'halloudezh politikel. Groñs e tiskuilh kement stumm a zo a zireizhder kevredigezhel.

"An aotroù meurdeus-meurbet Prederias  
(Davila

- furor Domini ! -

'zo bet kentañ "promotour an Araokaat"  
(e Nikaragwa  
hag ar c'hentañ Diktatur ;

degaset en deus da Nikaragwa, ya, gwir-bater eo, mirc'hed ha kezeg, moc'h ha loened all...  
(chatal dezhañ avat)  
ha "kentañ promotour ar c'henwerzh" e Nikaragwa, (a Indianed hag a vorianed)  
gant Panama ha Perou  
(en e vigi dezhañ)..."

Kouezhañ a ra klañv ar barzh gant hin Kentucky ; dav eo dezhañ dilezel an Trap hag ober e annez e Cuernavaca e Bro-Vec'hiko, e-lec'h ma vevo daou vloaz e kouent beneadat Santez-Vari an Dasorc'hidigezh... E Kolombia e peurechu e studioù war an doueoniezh, e kloerdi Medellin. Emañ gantañ war ar stern endeo e oberenn hollbouezus : 'Salmou'.

E 1965 ez eo beleget en Iliz-veur Managwa. Ur bloaz a-raok eo bet embannet SALMOU a stag d'ober berzh bras e-mesk ar yaouankizoù araokadour Latinamerikat. Evit pennoù bras direizh ez eo chigardusoc'h e werzennoù eget dispac'herion all trouzus ha gourdrouzus. Cardenal, barzh ha kevrinour war un dro ne bella ket diouzh Latinamerika hag he zud ; ne baouez ket a lopañ war heul-idoù ar gevalouriezh. A-zivout an tarañverezh e lavar :

"Goap a ra ouzhin an tarañverezh... Gant mil skin-gomz eo adlavaret e c'hevier... En holl gazetenoù emañ e fasltamallerzhioù ! Burevioù ispisial en deus evit fardañ gevier... War droioù lous ar bank, war an arc'hantourion hag ar c'hleuboù prevez... Gant da zorn, Aotroù, va diframm eus skilfoù ar bankoù/ Va dieub eus an arc'hantourion, /hag eus ezel ar c'hleuboù strizh/ eus ar re-se hag o deus bevet re, / leun-chouk ganto o yener-ezioù, / o zaolioù karget a zilerc'hiadoù : / d' ar chas e roont ar c'haviar."

E sigur an distroioù-gwall, an diskeladegoù pompadus, ar foranerezhioù gwallskouerius, an diheñcherion-bobl hag al loaverion-livastred

ez embann ar barzh :

"N'eus tamm gwirionded en o areizhoù,  
nag en o c'hemprezegoù-gwask ; eus peoc'h e  
komzont en o frezegennoù tra ma kenderc'hont  
mui-ouzh-mui a armoù e sell d'ar brezel ; eus  
peoc'h e komzont en emvodoù ar peoc'h ha dre  
guzh e prientont ar brezel. E-pad an noz hed-  
ha-hede kroz o skingaserioù gaouiat..."

Diwar-benn ar moustrerezh :

"Leun eo o burevioù gant steuñvoù tor-  
fedus ha dielloù spouronus,... Gant genoù ar  
mindrâilherezioù e komzont ; o zeodoù lufurus eo  
ar baionetezennoù..."

Erfin, diwar-benn dizamant an diktatou-  
rion :

"Gouel a reont bemnoz ha ni ' zo o sel-  
lout ouzh gouleier o gouelioù. Emaint gant o  
frikioù ha ni ' zo en toull-bac'h. Evito, Doue  
zo ur ger difetis, ar REIZHDED, ul lugan..."

Yaou 7 Here 1976

Ar verc'hig Patrisia a zo dezhi kuchen-  
nadoù blev ha n'eus bet biskoazh krib ebet, war  
a seblant, o stekiñ outo.

- Crecensio, " emezon, "n'ac'h eus ket  
aon evit penn da blac'hig ? Dont a raio an dokenn  
dezhi gant blev ken rouestlet. Perak ne blantez  
ket ar sizailh e-barzh ?

- Padre, n'eo ket aes... Mar krennan  
dezhi ar c'huchennoù-se e raio an dud anezhi  
ur g"condenado".

"Condenado" - "kendaonet" - eo amañ ar  
ger spagnolek evit envel an tasmant.

Niveradeg a oa e Bolivia, ar sizhun dre-  
menet. Banzer e-unan a zo aet da gemerout anv an  
dud. Fidel Castro en deus kaoz hir gant troc'h-  
erion ar c'horzh-sukr; levier Bolivia a wel pe-  
seurt keusteurenn a zo gant e sujidi. Unan a  
lavar bezañ eus an tu-kleiz, egile a zo stlapet

en tu-dehoù. Gwelet e vez paotred kleizelour  
oc'h en em vezviñ gant wiski (n'eo ket, boull-  
c'hurun !"traoù dous" ar beorion.) Gant pep hini  
e vez gwisket e chupenn, disheñvel he liv:gant an  
hini gwenn avat e vez marmouzet an hini ruiz ha gant  
hemañ e vez kaset ar faskouriezh en-dro kant  
gwech gwashoc'h eget gant ar c'hentañ. D'an traoñ  
ar chupennoù ha n'int peurvuiañ nemet lifrezioù  
d'ober brezel:da sakañ er memes sac'h eo Brejnev  
ha Somozo eus Honduras !

Lun 18 Here 1976

Ral ar wech gwelout grizilh dre amañ.  
An deizioù-mañ ez eus bet un tammig, e kornad  
pe gornad. Buan a-walc'h e teu an dud da spontañ.  
Delioù tener ar maiz nevez diwanet, an aval-douar  
japanat a vez dispennet, bleunioù ar gwez-kafe  
gwastet. Ha setu ma komzer diouzhtu eus kastiz  
a-berzh an neñv; ken e klasker piv ' zo pennabeg  
eus kounnar an Aotroù Doue. Re a vugale a varv  
bremañ hep badeziant... Hennezh en deus beziet  
evel-se daou grouadur... Forc'hadurioù a zo ;  
yud, garm ha leñv babiged an Ifernioù a vez kle-  
vet evel-se ; int-i o tiaraogiñ koumoulennoù du  
ar grizilh milliget.

"Sorc'hennet em boa gant va bro e klod  
ar vuhez. E goanag hag e startijenn he yaouankiz  
... Dont a ra moñsoù din (°). Manikinoù nemet-  
ken a verzan. Re a verc'hed diot ha vil a welan  
dindan o ficherezhioù doueel. Ar bagadoù, - salv  
daou pe dri - sonn ar vombar ha dudius an ton  
ganto, a ya a-dreuz kêr evel pa vefent bet da  
heul ur c'harr-kañv. Ya, un douaridigezh ! Se  
eo Breizh beredel, Breizh an hendraourion, ur  
vary a Vreizh... Dibunadegerion, da ober livus-  
oc'h (da ober bravoc'h?) a zoug, drochik, briadoù gwinizh  
war o divrec'h ; darn all, freilhoù ; hiniennoù  
c'hoazh o deus lakaet botoù-koad o zadoù-kozh...  
Kerzhadeg ar re varv gwisket botoù-koad ganto !  
'Roñsed-ourgouilh'va bro, ar re wirion,

(°) Stardañ a reont o meilhoù-dorn.

n'int ket ar re-se. A-walc'h o deus zoken gant ar gastaouerezh-se, a ra eus kelc'hioù keltiek zo strolladoù furlukined ha merc'hodennoù. Rannvroelouriezh truezus ! Prederouriezh ar beziou, boued evit ar re azezet...

D'ar mor ez aio hor 'mirc'hed-ourgouilh' ha ne c'hourvezint ket... Ijinañ a raimp gouelioù all... Ha gant ur c'hwezhadeg veur a vuhez hep folklor e lakamp Kemper da dregerniñ. Evit plijadur ar weladennerion a blij dezho ar broioù bev ha nann ar broioù o flaeriañ gant c'hwezh ar brein..."

Abaoe pellzo e soñjan evel C'havier Grall. Ha n'emaon ket va-unan. Bloavezhioù zo ne weler liv ebet eus emsaverion yaouank ar Vro Bagan e Gouelioù Meur Kernev. Serret o deus ar miridi. Lammet o deus er-maez eus ar vered. Adsavet o deus ar c'hoariva brezhon... Kristina a skriv : 'C'hoari a raimp ar pezhioù kempennet ar bloaz-mañ. Degemeret eo bet mat-tre an div oberenn gant tud ar vro... Degemeret eo bet mat ivez gant an emsaverion. N'ouzomp ket petra ' vo c'hoariet er bloaz-mañ... Nominoe-Oe pe traoù nevez skrivet gant Makoto pe tud all. Da ziviz-out eo..." (Lizher 6.9.76)

Pluenn broadelour Nizon n'em eus met. Gant komzoù dibabet kaer ha frazennoù skort ha reut e liv e soñjoù. Dipitus bras eo ne vefe ket e brezhoneg. Evelato e kredan lavarout ez on bet endeo ken kriz hag eñ evit barn gouelioù a zo "gouelioù-anaon" nemetken. Ar rannvroelouriezh ne c'hall ket dougen frouezhennoù all.

#### Gwener 28 Here 1976

Pemzektez zo eo kouezhet ar gurun war un ti ha lazhet ganti ur vuoc'h. Raktal o deus gwreg ha bugale klasket tud da zilojañ ha da adsevel o logell en ul lec'h all. Krediñ a reer e teu paz d'an tiegezh ha "gloria" a vez graet eus ar c'hleñved-se. Kig an aneval n'eo ket bet

gwerzhet, profet, ne lavaran ket... Perak ? Sakrelaet e chom c'hoazh ar gurun, e-touez ar re yaouank zoken ; ar skol kentañ-derez ne ra ket he labour. En iliz eo e ranker ober ur gentel diwar-benn skiantoù an natur evit diskleriañ petra eo an arnev... Ne vint ket mui e doare da ganañ ar Salm 29 : "Mouezh an Aotrou a dorr ar sedrez ; an Aotrou a frigas sedrez al Liban... Mouezh an Aotrou a lak ar gwez-derv da droiata, an Aotrou a ziwisk ar c'hoadeier..." Ur meulgan da c'halloud Doue skeudennet gant an arnev.

#### Lun lañ a viz Du 1976

Dibunet em eus hiziv hanter-kant kilometrad - mont-dont - war droad, evit lidañ Gouel an Hollsent a-gevret gant ur pemzek katolig benak ; dek eur a ya ganin da ober kement-all a hent, evit gweladenniñ penn pellañ ar barrez, adal peder eur hanter diouzh ar mintin betek pemp eur hanter diouzh an noz. Garet aes ha troadet skañv ar paotr c'hoazh, neketa ! Pa soñjan, daou vloaz zo e kaven pounner va div-c'har, goude mont eus 'Skol-an-Aod' betek ti-post Gwiseni. Pa ranker e teu gwellaenn deoc'h, kousto pe gousto !

O tiskenn eus ar vered, kludet uhel a-zioc'h ar froud, e lakaomp hor fri er chapel azvendour nevez savet. Lugernus an doenn ha frammet houarn ar prenestroù. Ur rangalon eo gwelout an "Ilizoù" o tispenn ar groc'henenn gatolik a oa dre amañ. Buan avat e teu an distan d'ar sektennoù-se. Ne bad an Amerindian ha marteze al Latinamerikan e netra ebet. Evit an Iliz katolik avat eo bet silet an doñjer en e wad. Ur wech ehanet a vont d'e chapel ne zistroio ket, siwazh, d'ur gedhinienn divalav he dremm ha fall he brud.

#### Sadorn 5 a viz Du 1976

Ur sebezenn eo en em gavout dirak ur froud ma ne gaver mui pont ebet d'e dreuziñ,

ramp warnañ hag, ouzhpenn, daougementet e naoz. Diriaou e oa ha fellout a rae din tizhout Agwada da sikour peurechuiñ ar chapel, enni meur a dra da glokaat. Ma ! En em goll a ris evit an trede gwech en tachad-se. Ar wenodenn ma oan boaz outi a oa bet sammet kuit. D'ar pred-mañ eus ar bloaz ez eus roudouz e pep lec'h ; pe-tra 'ta ' zo c'hoarvezet ? Diframmet didruez ar glannoù, aet gwriziennoù an eil start e-barzh egile, dilec'hiet ha berniet pezhioù reier, pilet gwez evel d'ober pont eus an eil ribl d'egile... Kaer eo din pignat ne welan digor ebet (1) evit achap ; kollet em eus tost d'un eur met gallout a ran lavarout da gCrescensio : "Soñj 'ta, ezhomm ac'h eus plankennoù ha koad evit sevel da di nevez ; aze avat, e-kreiz ar stêr, n'eo ket ar c'hefioù a ra diouer..."

- Ya, mat eo," eme ar c'houer yaouank.

"Aon am eus avat na vefent mac'hagnet rak, pavez gwez da heskennañ, ne vezont ket lezet da gouezhañ n'eus forzh penaos..."

Sul 6 Du 1976

Kendalc'homp da sellout ouzh Ernesto Cardenal. A-bouez eo ar bloaz 1966 e buhez ar barzh beleg. En em dennañ a ra e Solentiname, enezeg e-barzh Lenn-Veur Nikaragwa e-lec'h ma tiazeg ar gedhinienn gristen. Da stagañ ez eus gantañ daou geneil kloerdi n'eus ket fellet dezho mont da veleg. O-zri en em lakaont da zifraostañ ar c'hoad ha da sevel un nebeut tiez-prenn gant toennoù-plouz heñvel ouzh re gouerion an tachad-se. Mont a ra ar maout gantañ en ur genstrivadeg lennegel ha gant an arc'hant-se ha profoù bet digant kerent ha mignoned e roont o-zri lañs d'an oberenn huñvreet ganto. Evit bevañ en

(1) Sur-mat e oa bet un disac'hadenn kalz uhel-oc'h, diwar-bouez an tanfoeltr, hervez an dud, hag oc'h en em stlepel d'an daoulamm war-drañ eo o devoa doureier ar stankell-se graet an dismantr-se.

em daolont d'al labour-douar ; ne c'hallont ket avat herzel a vont da heul ar gouerion. Dav eo dezho klask un doare all da c'hounit o zamm kreun. Setu ma tivizont bezañ artizaned ha deskiñ ar vicher d'ar c'hounideion a zeu da vezañ skolidi eus ar c'hentañ troc'h. Brav e kavont gwerzh d'o c'hendero'hadou e Managwa, kêrbenn ar vroad. A-drugarez da se e c'hall ar gedhinienn mont gant he hent.

Bouedenn ar vuhez e Solentiname eo an arvesterezh : preder, emdenn, sioulded, sederni, darempred gant ar Grouadelezh ; n'eo ket un dec'hadenn tamm ebet.

"Bepred," a skriv Cardenal, "o deus ar venec'h pellaet diouzh ar bed. Direizh e oa ar bed evito hag ur bed gwelloc'h a felle dezho sevel. Ret eo deomp en em sachañ eus ar vuhez euzhvilus m'eo ar gevredigezh-beveziñ. Krediñ a ra din emañ ar gwir ganeomp da vont er-maez, e ser kevredigezhioù bihan, kevredigezhioù-enebiñ ('sociedades de protesta'). Soñjal a ra din ouzhpenn ez eo ar manac'h, an arvestour, un dispac'her. Eñ ivez a ro lusk d'ar c'hemm kevredigezhel ha politikel, ur gwirvoud trehontel en tu all d'ar marv. A-bouez eo, d'am menno, e vefe hiniennoù o teskiñ kement-se d'ar bed. Abenn ma vo ur gevredigezh kompez, ne vo ket dav pellaat diouzh ar gevredigezh."

Moarvat n'eo ket dispac'herion an holl venec'h, evel ma lavar Cardenal ; eñ avat a zo dispac'her. Nav bloaz zo e skriv barzhonegoù evit terriñ gant e nerzh war ar gevredigezh kev-alaour ken ez eo bet strollet e anv gant hini hini Che Guevara ha Camilo Torres.

Evelato, disheñvel a stumm eo e zispac'h dezhañ ; n'eo ket sevenet gant armoù ; o kenvevañ avat gant tud paourañ e vro. Sed aze e stumm groñs da enebiñ. Karet eo Cardenal evel an "Tad" gant gounideion Solentiname ; "Ernesto" a reont anezhañ.

Cardenal n'eo ket mignon d'ar feulster. Klask a ra un dispac'h peoc'hus met krediñ a ra dezhañ ne c'haller ket diouerout ur c'hemm er frammadurioù. "Ar paour-kaezh kevandir-mañ hag holl vroioù an trede-Bed, n'eus tu ebet d'o harpañ gant raklunioù karantezus ha n'eus anezho nemet kempennadurioù, peñseliadurioù, dic'houest da bareañ an droug, gwrizienn hag all. N'eus tu ebet d'ober netra hep diskar ar c'horvoerezh. An hent nemetañ da zont er-maez eus an isdiorreadur, an hent nemetañ evit an Denelezh a zo kemm ar frammadurioù kevalaour. Keit ha ma ne vo ket bet taolet d'an traoñ ar c'horvoerezh a zo pennabeg maz eus tud hep lojeiz ebet, ne dalv da netra sevel tiez. Bemdez emañ hor reizhiad o fardañ peorion; e-lec'h stourm ouzh ar baourentez, diwall na vije graet kaezhidi eus an dud, diwall na vije kenderc'het tud paour.

Gwener 27 Du 1976

"EUSKADI EUSKALERRIA" a dalv nemetken "pobl euskareger". Evel ma vefe direizh lakaat da Vreizh un anv a dalvezfe "pobl ar Vrezhonegerion". Niverus eo Euskariz kollet ganto o yezh abalamour d'ar galleg pe d'ar spagnoleg. A-ratozh e taver war ar ger "Euskadi" anvet gant Fulup II broad a-ziforc'h diouzh Spagn. A-ratozh pe get, roet e veze peoc'h ivez war Breizh. Em yaouankiz, e diabarzh hag e diavaez an Iliz n'em eus kanet nemet Breizh-Izel. Ur ger dizrouk... Un dra bennek evel "an dud hag a gendalc'h c'hoazh da zrailhañ brezhoneg..." Feiz, n'eo ket tamm ebet heñvel dra youc'hal "GORA ("Bevet") EUSKALERRIA" ha garmiñ "GORA EUSKADI" !

Gwener 27 Du 1976

Ur mignon a skriv : "Plijout a ra ho teizlevr d'al lennerion, dreist-holl d'ar re ruz pe rozik..." Cham a ran rez-ha-rez gant an douar ha divarrek on da lenn a-zoare an darvoudoù. Se n'eo

ket skrivañ. Ma tuan avat un tamm paper bennak n'eo ket evit ober plijadur d'ar re a fell dezho en em livañ pe a soñj dezho bezañ livet. Ha ne vefe ket tu da vont en tu all d'an dehoù, d'ar c'hleiz, d'ar gwenn, d'ar ruz, d'ar ruz-mouk, d'ar rozik...? N'eo ket deuet c'hoazh amzervezh an den reizh ha karantezus, tamm liv ebet warnañ ha banniel ebet en e zorn ? Ma n'emañ ket va fenn war grubuilh Fidel Castro, perak 'ta e vin stlapet gant hiniennoù etre divrec'h Aogust Pinochet?

Aet eo d'ober un droiad da welout e dud e Watasani, war an uhelgompezennoù, daou-c'hant kilometrad ac'halen, ma n'eo ket ouzhpenn.

-Pedro, pet gwech an deiz e vez debret duhont ?

-Teir gwech. Da lein, yod 'kinoua' ('greunenn bihan-bihan'), daou bladad da bep hini. Da verenn, avaloù-douar gant 'charki' ('kig salet ha disec'het gant an heol'). Da goan, yod 'kaniwa' ('greunenn vihan all')... Bet on o pesketa dluzed; eizh am eus paket, met n'int ket gwall vras. Koulméd a vez hemolc'het gant an archerion... Brav e oa gouel an Hollsent...

- Petra ac'h eus gwelet ?

- An Tad Francisco, ur Suisad a oferennas e-barzh ar vered. Eizh 'misioner' ('katekizour') a oa gantañ ; ar re-mañ ivez a vadez. Ar beleg a brezegas e kastilhaneg, ur c'hatekizour e keshwaeg, unan all en aymaraeg. Goulennet e oa profañ teir goulaouenn ha pemp 'soles' (daou gantim ha tregont en arc'hant gall). Droug ruz a yeas en Tad pa welas e oa savet ganto un deltenn er vered evit gwerzhañ evajoù. Ma rankas an archer kuzhat pep tra. Goude al lid e chomas ar 'visionerion' da bediñ e-harz ar beziou, goulennet gant ar familioù. Gant pep hini e sac'h evit dastum ar boued kinniget dezhañ. Ne vez ket divalav an eost...

Kannoù ez eus bet ivez da geñver Gouelioù Kala-Goañv... Gant ur voutailhe voe faoutet un tal. An hini gloazet a strinke e wad war an hini



en doa e daget, ur c'henwerzhour anezhañ ; ar re-se n'o deus ket aon da glask trouz ha da skeiñ rak arc'hant o deus d'en em dennañ, pa ranker dic'haouiñ.

- Perak 'ta e stlape evel-se e wad war an hini a glaske trabas outañ ?  
- N'ouzon ket...

Meurzh 28 Kerdu 1976

- Padre, an deizioù-mañ, ne labourer ket...  
- Perak 'ta ?  
- 'Temporas' eo... Birviñ a ra an douar hag arabat stekiñ outañ.

Kit da gompren un dra bennak ! Jezuz-Krist ne reer ket koun anezhañ. Ar Pevare Amzer a zo garanet en eñvoriou. Distreset, gwir eo, met petra ne vez ket mazaouet gant mab-den ? Ur bugel eo o tistummañ e c'hoariell. War e sikour, ivin-ou an diaoul ha krabanoù ar bed. Ya, ar bed ! Gwechall e Breizh, tu ebet da lenn ur bajennad eus BUHEZ AR SENT hep stekiñ ouzh ar ger-se a zo dezhañ daou ster. Er Skritur Sakr n'hon eus ket ar gwir da ober dibaboù. Ar "bed" eo an holl nerzhioù dirollet war an douar-mañ o stourm a-enep an Aviel.

Ur skouer all c'hoazh. Da Nedeleg, e San-Juan-del-Oro, eizh kilometrad ac'halen, da vare an oferenn, edo ar maer o rannañ c'hoarielloù d'ar vugale. E diavaez d'ar c'hêrioù bras, betek-henn, ne oa ket ar gouel-se kalz a dra. Ha setu ma teu ar c'hiz da reiñ profoù : traoù da c'hoari, traoù da zebriñ traoù da evañ. Bez' e c'haller eta en em c'houlenn : petra e vo Nedeleg evit ar rummad-se ? Emeur adarre o kammañ ar speredoù hag evit pegeit amzer ? Ned aio ket Nedeleg gant ur Mab da Zoue emzennet, - gant un tasad chokolad hag ur gouignenn, un tasad chokolad, ur c'harrsammig plastik, ne lavaran ket. Setu amañ labour ar "Bed".

- Sell 'ta ! Brein eo endeo dent da vabig.

- Ya, an dud a lavar eo en abeg m'he deus ar vamm debret vioù, e-keit ha ma oa brazez.

Merc'her 29 Kerdu 1976

Ur bern eskell-kroc'hen a ra o annez etre follennoù-houarn toenn ar presbital. A-wechoù e rankan gouzañv o nijadennoù pounner. En em c'houlenn a ran avat gant petra an diaoul en em vagont rak ne ziflipont ket kalz er-maez eus o zoulloù.

Ur c'hevrin eo evidon e chomfe bev kouerion ar glen-mañ ; o flanedenn eo hini va logod askellek... p'o deus lod all planedenn "karrig-ellig ar gourvarc'had".

Per a skriv, an deizioù-mañ : "Hag echu eo ganit "Le cheval d'orgueil" ? Ya, sur-mat. Amañ n'eo ket paouezet c'hoazh an tabut am eus kaset e-touez difennerion 'zo eus al levr-se. Ar skriva-gnerion c'hall ne vennont ket anzav perak ar marc'h-se en deus graet kement a verzh ganto. Skrivet em eus nevez zo da vMikael Mohrt, a zo bet gwechall un ezel, skañv a-walc'h e feiz, a v 'Vreiz Atao' (gantañ eo bet savet tresadennoù ar GORSEDD DIGOR). Deuet eo da vezañ unan eus ar skrivagnerion c'hall a-bouez bremañ, o pellaat - evel reizh - diouzh an Emsav... C'hwitet en deus, a-dost, war ar 'Priz GONCOURT', evit e levr "LA PRISON MARITIME", hag a zo ur romant eus ar c'hentañ. Karantez mesket gant darvoudoù ijinet (?) gant ar skrivagner : dilestradur armoù e Breizh evit an Emsaverion, aes a-walc'h anavezout darn anezho : Lainé, an Abad Madeg hag all. Mikael MOHRT a oa e gerent marc'hadourion binvidik a Vontroulez. Morse n'en deus bet darempredoù gant an dud vunut hag evitañ da vezañ taolennet dispar Breizh, e Vreizh - eñ n'eo nemet hini an douristed, ar c'hazinoioù, an aod e-pad an hañv, e lec'hioù brudet evd Trebeurden, Perroz hag all... Pesketaer ebet en e romantoù na kouer ebet, eveljust. Evel ma oa da c'hortoz, plijet-bras eo bet gant Per-Jakez Helias ha diskleriet em eus dezhañ ar perak, hervezon : P.J. Helias a zo bugel da Vreizh, ur bugel oc'h

asantiñ ouzh marv marv e vamm. Evit ar mare n'em eus ket bet respont ebet c'hoazh..."

(Plougernev, lañ a viz Kerzu)

Kendalc'homp da sellout ouzh ar manac'h-barzh Ernesto Cardenal. Penaos e ve du-se, en enezenn Solentiname ? Kravezel'eo ar gedhinienn diazezet gantañ, relijiel avat en ur ster ledan kenañ. Rak dizoueidi ha marksourion o deus gallet bevañ du-hont un herrad mat a amzer. Aliet gant Tomaz Merton, ne lakaas Cardenal nemet ur reolenn: a oa mont en-dro hep reolenn ebet. Pep frankiz a zo lezet gant an dud. Den n'eo perc'henn da netra ha pep unan a zegas d'ar re all ar pezh a zo en e c'halloud.

Er penn-kentañ ne oa nemet menec'h o vont d'ober ar gedhinienn ; goude e teuas e-barzh tud dimezet ; ha se evit reiñ muioc'h a vuhez d'ar manati. Darempred o deus an darn-vrasañ eus an izili gant kouerion an enezenn. Ganto o deus savet ur gevelouri ha diorreet an artizanelezh. Ur skol hag un ti-yec'hed a zo bet krouet ivez gant ar beleg-barzh, en deus gouezet ouzhpenn dedennañ d'an enez livourion hag arzourion eus Managwa ; ganto ez a d'ar skol al labourerion-douar. Dege-mer vat a vez graet d'an holl weladenourion.

Penaos e vez lavaret an oferenn e Solentiname ? War ar sizhun e vez graet an Eukaristia e-barzh ti izili ar gedhinienn. "Kedhiniennus"-tre eo al lid. Lennadennoù ha divizoù ; ne vez prezegenn ebet gant Cardenal. Kaoz vras a vez evlatogant ar berzhidi, int-i azezet war al leur-zi ; goude ar c'hensakradur, hep dilhad-oferenñañ, war an daol-voued nemetken, pep unan a dosta evit kenunvaniñ en e-unan.

Da sul, tud an enezenn a-bezh en em stroll en un ilizig, kinklet gant tresadennoù ar vugale. Un diviz eo adarre ar brezegenn ; ar gouerion a lavar o soñj, danvez kevredigezhel ha politikel ennañ, hep na rafe diouer an donder doueoniell. Souezhet eo bet meur a weladenner gant pebezh skiant-varn e oar an enezidi displegañ an Aviel.

Hervez Cardenal, aet eo pell-kenañ an Eukaristia diouzh ar pezh ma oa er penn-kentañ ha deuet da vezañ un dra re sakr. " Ur goan pe ur banvez bihan..."

~~~~~

~~~~~  
"Kedhiniennus" - tre eo al lid. Lennadennoù ha divizoù ; ne vez prezegenn ebet gant Cardenal. Kaoz vras a vez evlatogant ar berzhidi, int-i azezet war al leur-zi ; goude ar c'hensakradur, hep dilhad-oferenñañ, war an daol-voued nemetken, pep unan a dosta evit kenunvaniñ en e-unan.

~~~~~  
Da sul, tud an enezenn a-bezh en em stroll en un ilizig, kinklet gant tresadennoù ar vugale. Un diviz eo adarre ar brezegenn ; ar gouerion a lavar o soñj, danvez kevredigezhel ha politikel ennañ, hep na rafe diouer an donder doueoniell. Souezhet eo bet meur a weladenner gant pebezh skiant-varn e oar an enezidi displegañ an Aviel.

LIZHIRI

Digant Youenn TROAL

"Embannet hoc'h eus ur pezh labour : hini Per Even. Siwazh, betek-henn n'em eus ket c'hoazh sellet kalz outañ. Da gentañ e vo ret din klokaat va geriadur spagnoleg-galleg. Ennañ e lakaan ar gerioù nevez...

"Amañ, brav ar vuhez. Ur blijadur eo kejañ gant tud, zoken re yaouank, n'int ket aet droch gant an tamm "deskadurezh-se". Hiniennoù ' zo pastored (relijiel), klañvdiourion ha bremañ lizherennerion. Bec'h a ra al Levierzh evit deskiñ lenn ha skrivañ d'an holl. Ma kavfec'h din levr-hentenn Freire... Kasit, mar plij, dre garr-nij. Freire an hini eo a gavas an doare da zeskiñ lenn ha da emskiantekaat war an hevelep tro..."

Ma c'hellfe unan eus hol lennerion pourchas al levr meneget el lizher-mañ e vefe stad ennomp ouzh e gas d'hor c'heneil.

=====

+++++

Liestennet gant ar gelaouenn Ar Rener:Y.Ollivier
CPPP : 50 015

LITURGI

Dizant Youenn TROAL

"Embannet hoc'h euz ur pezh labour : hini Per Ev-
 er. Siwazh, betek-henn n'eus ket o'harzh gellier
 kalc outañ. Er gentañ e vo pet dia klouar va gar-
 tudur epanoier-galliek. Emañ e lakaa ar gentañ
 never...

"Amañ, brav ar vobez. Ur blijadur eo keñañ gant
 tud, koben re vadouek, n'int ket sel droc'h gant
 ar c'han "dehanteh-se". Hiniennou 'zo pastored
 (relijjiel), klabedourion na bremañ klabedourion.
 Hoc'h e ra ar leviterek evit deskiñ lenn ha skriv-
 añ d'an holl. Ma kalcoc'h dia leviterekou
 kalc, mar glij, dre garr-nij. Treite ar dind eo
 a gavas ar doue ha deskiñ lenn ha da emskiantek
 ker ar devoled Eo..."

Ma c'heñfe unan eoa hoi kementio horreuz ar lez
 ungeret ar klabedourion e velle euz unger
 euz d'hor e'heñfe.
